



LISEIDI DIWAN, O FAMILHOÙ HAG AR BREZHONEG

Enklask kaset da benn etre miz Du 2019 ha miz Genver 2020

314 lisead Diwan

Rentañ-kont berr

Kenurzhiañ an enklask : Katell Chantreau (doktoradez Skol-veur Roazhon 2, CREAD)
ha Gildas Grimault (kelenner Skiantoù ekonomikel ha sokial e Lise Diwan Karaez)
Alioù : Stefan Moal (CRBC / Roazhon 2), Hugues Pentecouteau (CREAD / Roazhon 2), Catherine Bouroulleg (Ofis Publik ar Brezhoneg)
Skoazell : Lise Diwan Karaez
Sevel ar rentañ-kont : Katell Chantreau ha Gildas Grimault
Maketenniñ : Catherine Bouroulleg, Katell Chantreau, Fabrice Véronneau

Etre miz Du 2019 ha miz Genver 2020, da-geñver kentelioù Skiantoù ekonomikel ha sokial, e oa bet kinniget d'ur c'hlasad eilvet eus lise Diwan Karaez sikour sevel ha kas da benn un enklask el lise diwar-benn al liseidi, o familhoù hag ar brezhoneg. Meur a bal a oa bet lakaet d'an dra-se evit al liseidi :

- dizoleiñ metodologiezh un enklask sokiologel produiñ sifroù,
- kompren penaos e vez levezonet sokializadur ar re yaouank gant ar familh ha gant ar skol,
- prederiañ, hep barnañ, war implij ar brezhoneg gant al liseidi.

Ouzhpenn ar perzh pedagogel evit al liseidi e oa ur perzh skiantel a-dreñv d'ar raktres-se. Tri fal bras a oa bet lakaet :

- kompren gwelloc'h endro yezhel al liseidi,
- produiñ sifroù evit magañ un enklask war treuzkas ar brezhoneg er familhoù kaset gant Katell Chantreau da-geñver un dezenn e Skiantoù an Deskadurezh, renet gant Hugues Pentecoteau ha Stefan Moal, hag arc'hantaet gant Skol-veur Roazhon 2 ha Rannvro Breizh,
- sevel un ostilh padus evit studiañ emdroadur an treuzkas brezhoneg er familhoù er bloavezhioù o tont, gant ar soñj adober an enklask-se el liseoù Diwan, bep tri bloaz, pa vez nevesaet penn-da-benn ur rummad liseidi. An OPAB a gemero e karg an enklask-se en dazont (dalc'h kentañ e 2022-2023).

Er pajennoù da heul e vo kavet ganeoc'h disoc'hoù pennañ an enklask-se. Muioc'h a disoc'hoù hag a ditouroù war ar mod da sevel ar feuriaderioù a vo kavet ganeoc'h en diell klok.

TAOLENN

1. Al liseidi

- 1.1. Piv eo al liseidi ?
- 1.2. Tomm ouzh ar brezhoneg met lakaet diaes evit e implij
- 1.3. Ar merc'hed mennetoc'h

2. Mammoù ha tadoù al liseidi


- 2.1. Piv eo tud al liseidi ?
- 2.2. Peseurt plas evit ar brezhoneg e familhoù al liseidi ?
 - 2.2.1. Ar brasañ zo tomm ouzh ar brezhoneg
 - 2.2.2. N'eo ket saveteiñ ar brezhoneg abeg pennañ ar skoliata e Diwan
 - 2.2.3. Ar brasañ eus ar gerent a oar brezhoneg mat pe un tamm
 - 2.2.4. Treut eo an treuzkas er familhoù
- 2.3. Peseurt efed en deus implij ar brezhoneg er familhoù war ar perc'hennañ gant al liseidi ?
 - 2.3.1. Kaout kerent divrezhonek met tomm ouzh ar yezh n'eo ket diefed
 - 2.3.2. An treuzkas er familh en deus un efed kreñv war ar re yaouank

1. AL LISEIDI

1.1. Piv eo al liseidi ?


315 lisead a oa skoliataet e lise Diwan Karaez en miz Kerzu 2019. 314 lisead zo bet goulenmataet ganeomp.

◆ Reizh



Diazez : 314 lisead
Lenn : 47 % eus al liseidi zo paotred.

◆ Bloaz ganedigezh




Diazez : 314 lisead
Lenn : 110 lisead zo ganet e 2004.


◆ Live klas

| | Niver a glasadoù | Niver a dud |
|--------|------------------|-------------|
| Eilvet | 4 | 108 |
| Kentañ | 3 | 99 |
| Termen | 4 | 107 |


Diazez : 314 lisead
Lenn : 4 c'hlasad Termen a vod 107 skoliad Termen, da lâret eo 34 % eus al liseidi.



◆ Lec'h bevañ




Diazez : 314 lisead
Lenn : 61 % eus al liseidi zo o chom e Penn-ar-Bed.



Diazez : 314 lisead
Lenn : 89 % eus al liseidi zo o chom e Breizh-Izel.


◆ Skoliata kent

Kentañ derez




Diazez : 314 lisead
 Lenn : 25 % eus al liseidi a oa skoliataet e klasoù divyezhek publik er c'hentañ derez.

Skolaj



Diazez : 314 lisead
 Lenn : 25 % eus al liseidi zo o tont eus skolaj Diwan ar Releg.



Diazez : 314 lisead
 Lenn : 30 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan Plijidi a oa skoliataet en ur c'hlas divyezhek publik er c'hentañ derez.

Muioc'h a verc'hed zo el lise, met n'eo ket disheñvel diouzh al liseoù all. 53 % eus al liseidi o prientiñ ur vachelouriezh e Frañs zo merc'hed.


Kempouez eo an tri rummad e lise Diwan dre vras. N'eo ket dreistlevizonet sifroù an enklask gant ar rummad-mañ-rummad eta.

Dreistdileuriet eo liseidi Breizh-Izel. Lec'hiadur al lise, e Penn-ar-bed, a zo kaoz kredapl. Skañvoc'h eo pouez ar skolidi o tont eus Liger-Atlantel hag Il-ha-Gwilen e-keñver ar pezh eo er c'hentañ derez. Kreñvoc'h eo pouez ar re o tont eus Penn-ar-Bed hag eus Aodoù-an-Arvor. Dedennus e vo gouzout hag-eñ vo desachet muioc'h al liseidi eus Breizh-Uhel gant digoradur lise Diwan Gwened.

Ne vez ket desachet skolajidi an hentenoù divyezhek gant al lise Diwan. Etre ar CM2 hag ar 6vet klas e c'hoarvez ar cheñchamant hentenn dreist-holl.

1.2. Tomm ouzh ar brezhoneg met lakaet diaes evit e implij

◆ O santimant war o live brezhonek




Diazez : 313 lisead

Len : 48 % eus al liseidi a gav dezho o deus ul live brezhoneg mat a-walc'h.

Evezhiadennoù : 71 % eus al liseidi o deus ar santimant o deus ul live mat pe mat a-walc'h e brezhoneg. En o aez e seblantont bezañ gant implij ar yezh skol peogwir n'eus nemet 5% anezho a disklêr bezañ bresk o live brezhoneg. Petra a sinifi ul live mat pe mat a-walc'h evito avat ? Al live ret evit heuliañ ar c'hentelioù ? Pe evit kaozeal e brezhoneg etre kamalade-ze-d ? Pe evit kaozeal e brezhoneg e-maez Diwan ?

◆ O santimant ouzh ar brezhoneg



Diazez : 312 lisead

Len : 30 % eus al liseidi eo tomm-tre o c'halon ouzh ar brezhoneg.

Evezhiadennoù : Niverus eo al liseidi a zo tomm-tre pe tomm a-walc'h ouzh ar brezhoneg : 79 % anezho. Treut-tre eo an niver anezho ha na reont forzh : 14 lisead-ez war 314 lisead-ez. N'eus lisead ebet en deus respontet e oa skuizh gant ar brezhoneg pe a-enep. Dav eo gouzout e vez al liseidi a zibab mont d'al lise Diwan peurliesañ. Ouzhpenn ar brezhoneg a vroud anezho d'en ober avat : an aergelc'h, ar vignoned pe an hunva a vez meneget ganto alies. Ar pezh zo splann eo ne vezont ket digalonekaet pe heuet gant ar brezhoneg gant ar skoliata e Diwan, ar pezh a c'hallfe c'hoarvezout o c'houzout eo staget ar brezhoneg ouzh ar skol, ul lec'h rediet. Bezañ tomm ouzh ar brezhoneg ne sinifi ket avat komz brezhoneg ingal.


◆ Implij ar brezhoneg gant ar breudeur ha/pe ar c'hoarezed



Diazez : 287 lisead o deus breudeur ha/pe c'hoarezed a oar brezhoneg
 Lenn : 64 % eus al liseidi a gomz brezhoneg d'o breudeur ha/pe d'o c'hoarezed a-wechoù.

Evezhiadennoù : Boas eo ar braz eus al liseidi kaozeal e galleg gant o c'hoarezed pe o breudeur. Ar skoliata e Diwan ne lak ket ar brezhoneg evel yezh kaozeal ordin etre ar c'hoarezed hag ar breudeur, met silañ a ra etrezo un implij ur wech an amzer evit an div drederenn anezho.


◆ **Implij ar brezhoneg gant an dud-kozh**



Diazez : 207 lisead o deus tud-kozh a oar(e) brezhoneg
 Lenn : 9 % eus al liseidi o deus pe o deus bet tud-kozh vrezhonek a gomz(e) brezhoneg gante atav.

Evezhiadenn : A c'hell bezañ en o zouez liseidi a gomz atav brezhoneg gant lod eus o zud-kozh brezhonek ha james gant lod all, daoust dezho bezañ brezhonegerien ivez.


◆ **Pleustroù sevenadurel brezhonek (er-maez eus al labour skol)**



Diazez : etre 309 ha 312 lisead
 Lenn : 10 % eus al liseidi a gan e brezhoneg alies.

Evezhiadennoù : Splann eo pegen diaes eo d'al liseidi mont davet pleustroù sevenadurel brezhonek en ur bed globalizet ma vez kreñv ha desachus ar c'hrouidigezhioù sevenadurel e galleg, saozneg ha me oar. 20 lisead-ez war 314 o deus pleustroù sevenadurel vrezhonek en un doare reoliek er-maez eus ar c'hentelioù, ar c'han an aliesañ. Evit ar braz eus al liseidi eo rouez-tre ar pleustroù-se. An deskiñ skrivañ ha lenn e brezhoneg ne glot ket gant un implij sevenadurel er-maez eus ar c'hentelioù.

◆ **Perzh er stourm evit ar brezhoneg (buhez kevredigezhel, stourm politikel, krouiñ, manifestiñ...)**




Diazez : 312 lisead
 Lenn : 27 % eus al liseidi ne gemeront ket perzh tamm ebet er stourm evit ar brezhoneg.

Evezhiadennoù : Ur c'hard eus al liseidi a stourm evit ar brezhoneg kalz pe kalzig. N'eo ket dister. Stourm evit ar brezhoneg a c'hall bezañ un doare da sokializañ implij ar brezhoneg er-maez eus al lise ha da greñvaat o identelezh brezhonek. An doareoù stourm pennañ meneget gant al liseidi : manifestadegoù (meneget gant 37 % anezho), perzh er vuhez kevredigezhel (8%), Redadeg (7%), stourm evit ar breved pe ar bak e brezhoneg (6%), sinadegoù ha perzh e tabutoù (6%)...

◆ Raktres treuzkas ar brezhoneg d'ar vugale

Ma 'tefe bugale un deiz bennak, en em welout a rafes komz brezhoneg outo...

- Atav pe dost E brezhoneg kement hag en ur yezh all A-wechoù Nebeut-tre pe james
 Se zepanto eus ma fried N'ouzon ket



Diazez : 308 lisead

Lenn : 28 % eus al liseidi zo en soñj da gomz brezhoneg d'o bugale atav.

Evezhiadennoù : 58% eus al liseidi zo en soñj da gomz brezhoneg d'o bugale atav pe kement hag en ur yezh all, m'o deus bugale un deiz bennak. Bamus eo ar c'hoant treuzkas-se ! Diskouez a ra pegen tomm eo al liseidi ouzh ar brezhoneg, penaos en em santont gouest da gomz brezhoneg d'o bugale da zont, pegen emskiantek int eus dazont ar yezh, ha penaos o deus lonket raktres Diwan en ur mod.


Ar pleustroù avat, 10 pe 15 vloaz goude, pa deuio lod eus al liseidi da vezañ tad ha mamm (28,5 vloaz eo keidenn ar babig kentañ evit ar merc'hed er Frañs ha 31 bloaz evit ar baotred), a vo kalz dindan ar sifroù-se moarvat. Petra a vez kollet gante etre 20 ha 30 vloaz a lak ar c'hoant treuzkas da deuziñ ? An aezamant da gomz, bet roet gant ar skoliata e Diwan, a vez kollet da gentañ, peogwir e vez startoc'h kaout un implij pemdeziek eus ar yezh goude al lise. Da heul e tremenont eus un endro hollvrezhonek ma vez dreistprizet ar brezhoneg d'un endro holl-c'hallek pe dost ma vez dister plas ar brezhoneg enni. Treuzkas ar brezhoneg n'eo ket talvoudekaet dre ret eo o endro labour pe mignonned.

Daou garg o deus ar yezhoù : binvioù int evit daremprediñ an dud, hag objedoù arouzel evit dougen ur sevenadur, un identelezh. Al liseidi zo tapet etre an daou garg-se. Splann a-walc'h eo talvoudegezh arouzel ar brezhoneg evit al liseidi : tomm eo ul lodenn vat eus al liseidi ouzh ar brezhoneg, prest int da stourm evit ar yezh, fiziañs o deus en o live yezh, gouzout brezhoneg a zegas lorc'h enno.

Koulskoude e vezont lakaet diaes evit kaozeal e brezhoneg kenetrezo, gant o breudeur ha / pe o c'hoarezed, pe evit tennañ gounid eus an danvez sevenadurel brezhonek. Ne dalv ket n'o deus ket c'hoant komz muioc'h, evel ma vez diskouezet gant o raktres treuzkas brezhoneg d'o bugale da zont. Abegoù all a c'hallomp kavout evit displegañ an diouer a implij : danvez sevenadurel mouget gant kinnigoù puilh e yezhoù all, skeudenn ur yezh komzet gant ar re gour ha n'eo ket hini ar vugale, ur yezh mestroniet evel danvez skol met berr evit ar pemdez : gerioù gros, geriaoueg ar seks, luc'haj, zo dianavezet dezho.

1.3. Ar merc'hed mennetoc'h

◆ Santimant barreezh war ar brezhoneg




Diazez : 313 lisead

Lenn : 29 % eus al liseadezed a gav dezho o deus ul live mat e brezhoneg.

Evezhiadennoù : Da vare al lise o dez ar merc'hed muioc'h a fiziañs en o barreezh war ar brezhoneg eget ar baotred. Un danvez skol, un dra degaset gant ar skol, eo ar brezhoneg ha dre vras er Frañs e vez ar merc'hed muioc'h en o aez er skol eget ar baotred.

◆ Santimant ouzh ar brezhoneg




Diazez : 312 lisead

Lenn : 23 % eus ar baotred eo tomm-tre o c'halon ouzh ar brezhoneg.

Evezhiadennoù : Tommoc'h e vez ar merc'hed ouzh ar brezhoneg eget ar baotred. Techet e vez ar baotred da sellet ouzh an traoù degaset gant ar skol gant un tamm dispriz, betek nac'h degemer anezho a-wechoù. Diskouez entan bras ouzh ar brezhoneg a vefe mont a-du gant ar skol penn-da-benn, ha se, da vare ar c'hrennoad, zo diaesoc'h da asumiñ pa vezer ur paotr eget pa vezer ur plac'h.

◆ Perzh er stourm




Diazez : 312 lisead

Lenn : 7 % eus al liseadezed a zisklêr stourm kalz evit ar brezhoneg.

Evezhiadennoù : Ordin e vez lâret e vez stourmet muioc'h evit ar brezhoneg gant ar baotred eget gant ar merc'hed. N'eo ket ar pezh a ziskouez ar sifroù-se. Doareoù stourm disheñvel o deus ar merc'hed hag ar baotred marteze ? Mod ar baotred da stourm a vez gwelet muioc'h er mediaoù marteze ? (13 paotr hag ur plac'h a oa bet a-enep al lezenn o respont e brezhoneg d'an amprouenn matematikou e 2019).

◆ Eskemmoù gant o zud war ar choazoù skoliata




Diazez : 301 lisead

Lenn : 42 % eus paotred al lise o deus komzet meur a wech eus abegoù ar skoliata brezhonek gant o zud.

Evezhiadennoù : Ar merc'hed o deus komzet eus ar skoliata brezhonek gant o zud kalz muioc'h eget ar baotred. Marteze int bet aketusoc'h ouzh traoù bet lâret dezho gant o zud ? Marteze o deus klasket kompren ha broudet o deus prantadoù eskemm war se ? Pe marteze c'hoazh int kustumoc'h evit ar baotred da gomz gant o zud ?

◆ Pleustroù sevenadurel brezhonek




Diazez : 312 lisead

Lenn : 9 % eus al liseadzed o deus pleustroù sevenadurel kreñv e brezhoneg.

Evezhiadennoù : Ar merc'hed a ya muioc'h eget ar baotred war-zu pleustroù sevenadurel brezhonek. Pleustroù er-maez eus ar skol int met marteze int bet broudet gant ar gelennerien, ar pezh a c'hell reiñ c'hoant d'ar merc'hed tostaat outo ha kaout an efed kontrol war ar baotred. Daoust da se eo izel a-walc'h ar pleustroù gant ar merc'hed ivez.

◆ Raktres treuzkas brezhoneg d'o bugale



Diazez : 308 lisead

Lenn : 25 % eus paotred al lise ne oaront ket hag-eñ komzint brezhoneg d'o bugale pe get.

Evezhiadennoù : Dre vras e vez avañsetoc'h ar merc'hed war ar raktres treuzkas brezhoneg d'o bugale pe get. N'eus nemet 14% anezho n'o deus soñj ebet war ar pezh a vo graet ganto, padal ez eus 25% eus ar baotred ha na oaront ket. E-touez ar re o deus ur soñj sklaer dija e verzer eo un tamm brasoc'h c'hoant treuzkas ar merc'hed eget hini ar baotred.

Desachet e vez muioc'h merc'hed al lise gant ar brezhoneg eget ar baotred. Ne zegas ket an dra-se un efed bras war implij ar brezhoneg gante avat, evit komz gant o zud, gant o zud-kozh pe gant o breudeur ha c'hoarezed. N'eus ket kennebeut un diforc'h bras paotred / merc'hed war ar perzh er stourm evit ar brezhoneg.

Un dregantad bihan a baotred a zo pell-tre diouzh ar brezhoneg e-keñver implij ha santimant. Diwar ar 14 lisead a lâre ne reont forzh eus ar brezhoneg ez eus 12 paotr. Padal ez eus nebeut-tre a merc'hed a lak a-gostez ar brezhoneg penn-da-benn. Memes ma'z eo bihan o implij eus ar brezhoneg e klask ar merc'hed reiñ un tamm plas dezhañ memestra.

Ar jener an hini eo pe ar skol a levezon liamm al liseidi ouzh ar brezhoneg ? Gwelet e vez ar brezhoneg evel un danvez skol gant ar braz eus al liseidi, ha levezonet eo an doare bezañ er skol gant ar jener. An holl studiadennoù er Frañs a ziskouez e vez tommoc'h ar merc'hed ouzh ar skol eget ar baotred. Marteze n'eo ket desachet ul lodenn eus ar baotred gant ar brezhoneg peogwir n'int ket plijet gant an doare skol ?

2. MAMMOÙ HA TADOÙ AL LISEIDI

314 lisead zo met 22 koublad breudeur / c'hoarezed zo en o zouez. 292 « familh » zo en holl eta (familh a vez graet eus ar c'houblad kerent pe eus ar vamm hec'h-unan pa ne vez ket tad pe mamm all ebet). Titouroù hon eus diwar-benn 292 mamm ha 287 tad. Cheñch-dicheñch eo an niver a dud e pep rummad avat kar lod eus al liseidi n'o deus ket respontet d'an holl c'houlennoù.

Bezit war evezh ! Er rannbennad-mañ e vo roet sifroù war an tadoù hag ar mammoù, ha n'eo ket war al liseidi. Lâret e vo da skouer ez eus 87 mamm a oar brezhoneg e-touez mammoù al liseidi, ha ne vo ket lâret ez eus 94 lisead o deus ur vamm hag a oar brezhoneg.


2.2.1. Piv eo tud al liseidi ?

◆ Bloaz ganedigezh

Mammoù : etre 1958 ha 1982 int ganet. 1971 eo ar geidenn vloaz.


Tadoù : etre 1946 ha 1980 int ganet. 1968 eo ar geidenn vloaz.

◆ Lec'h orin



Diazev lec'h orin : 270 mamm ha 265 tad (535)
 Lenn : 22 % eus kerent al liseidi o deus tremenet o bugaleaj e Bro-C'hall.


◆ Lec'h bevañ



Diazev lec'h bevañ : 286 mamm ha 269 tad (555)
 Lenn : 20 % eus kerent al liseidi zo o chom en Aodoù-an-Arvor.

2.2. Peseurt plas evit ar brezhoneg e familhoù al liseidi ?

2.2.1. Ar brasañ zo tomm ouzh ar brezhoneg





Diazev : 268 mamm ha 262 tad (530)

Lenn : 6 % eus mammoù al liseidi ha 14% eus an tadoù ne reont forzh eus ar brezhoneg hervez o bugale.

Evezhiadenn : 21 mamm ha 18 tad n'eo ket gouest o bugale lâret pegen tomm int ouzh ar brezhoneg.

Familhoù

Liseidi



Diazez : 292 familh
 Lenn : 43 % eus ar familhoù a zo enno un tad hag ur vamm hag a zo tomm ouzh ar brezhoneg.


Diazez : 314 lisead
 Lenn : 44 % eus al liseidi eo tomm o zad hag o mamm ouzh ar brezhoneg.

Evezhiadenn : 80 % eus al liseidi zo o tont eus familhoù tomm ouzh ar brezhoneg. Evit ar re all e vo kavet pe get en diavaez eus o familh un tamm talvoudegezh d'ar fed deskiñ ha komz brezhoneg.

2.2.2. N'eo ket saveteiñ ar brezhoneg abeg pennañ ar skoliata e Diwan

◆ An abegoù skoliata brezhonek

D'az soñj, peseurt abegoù pennañ o deus broudet da dud da gas ac'hanout d'ur skol vrezhonek ?




Diazez : 314 lisead
 Lenn : 65 % eus al liseidi a soñj dezho int bet skoliataet e brezhoneg evit deskiñ brezhoneg. Izel a-walc'h eo pa ouzer eo pal pennañ Diwan. Pa sellomp spisoc'h n'eus nemet 37 % a lak war-wel an abeg « evit saveteiñ ar brezhoneg ». An abeg-mañ zo tost da raktres Diwan koulskoude, peogwir eo an implij sokial pal an deskiñ brezhoneg hervez raktres Diwan.

Evezhiadennoù : War-bouez an abeg pragmatek (skol dostañ an ti 8%) e vez merzet ez eus ur pouez gant pep abeg. 65 % eus al liseidi a soñj dezho int bet skoliataet e brezhoneg evit deskiñ brezhoneg. Izel a-walc'h eo pa ouzer eo pal pennañ Diwan. Pa sellomp spisoc'h n'eus nemet 37 % a lak war-wel an abeg « evit saveteiñ ar brezhoneg ». An abeg-mañ zo tost da raktres Diwan koulskoude, peogwir eo an implij sokial pal an deskiñ brezhoneg hervez raktres Diwan.

An abeg kognitivel zo pouezusoc'h eget saveteiñ ar yezh a-benn ar fin. An abegoù pedagogel n'int ket dister kennebeut. Diwar-se e welomp ne glot ket dre ret palioù ar gerent gant reoù Diwan. An dra-se zo kaoz an diaesterioù evit astenn implij ar yezh etre al liseidi er-maez eus ar c'hentelioù marteze ?

◆ **Eskemmoù kerent / liseidi diwar-benn abegoù ar skoliata brezhonek**

Ha tro 'teus bet da gomz eus abegoù ar skoliata brezhonek gant da dud ?




Diazez : 301 lisead

Lenn : 54 % eus al liseidi a zisklêr bezañ bet komzet meur a wech eus abegoù ar skoliata brezhonek gant o zud.

Evezhiadennoù : Etre 15 ha 18 vloaz eo al liseidi, 26 % anezho o deus soñj bezañ komzet eus abegoù o mod skoliata gant o zud ur wech nemetken hag 20% gwech ebet. Er goulenn kent war an abegoù skoliata n'eus nemet 4% eus al liseidi ne oaront ket perak o deus dibabet o zud skoliata anezho e brezhoneg. An dra-se a dalv eo bet (dam)komprenet an abegoù a oa gant o zud dre santout, dre glevet kaozeadennoù, met pas dre gaozeal ganto war-eeun.

2.2.3. Ar brasañ eus ar gerent a oar brezhoneg mat pe un tamm


◆ **Ha goût a reont brezhoneg ?**



Diazez : 292 mamm ha 286 tad (578)

Lenn : 21 % eus tadoù al liseidi a oar brezhoneg mat.


Familhoù



Diazez : 292 familh

Lenn : E 47% eus ar familhoù e oar brezhoneg an tad ha/pe ar vamm (BZG).

Liseidi




Diazez : 314 lisead

Lenn : 36 % eus al liseidi o deus un tad ha/pe ur vamm a oar brezhoneg un tamm (BZG-).

Evezhiadennoù : Well-wazh ez eus un drederenn eus ar gerent a oar brezhoneg, un drederenn a oar un tamm, hag un drederenn ne oaront ket tamm ebet, sañset. E tost ur familh war ziv ez eus un tad pe ur vamm (pe an daou) a oar brezhoneg mat pe mat a-walc'h. Ur feur barregezh kalz uheloc'h eget hini poblañs Breizh dre vras. Barregezh kerent al liseidi war ar brezhoneg zo kalz uheloc'h eget hini kerent skolioù Diwan ar c'hentañ derez, ar pezh a ro da soñjal e vez barregezh ar gerent ur vroud bennak evit ma kendalc'hfe ar skolidi en hentenn Diwan.

◆ Pegoulz o deus desket ?



Diazez : 85 mamm ha 79 tad (164)


Lenn : 44 % eus ar mammoù ha 67 % eus an tadoù brezhonek o deus desket brezhoneg a-raok kaout o bugel kentañ.

Evezhiadennoù : 51 tad ha mamm (9% eus an holl gerent, 31% eus ar gerent vrezhonek) o deus desket brezhoneg goude ganedigezh o bugel kentañ hag a zo deuet da vezañ brezhonegerien gouest da gomz mat pe mat a-walc'h. Met ne dalv ket eo deuet a-benn ar gerent-se da blantañ brezhoneg e buhez o familh. Ar gerent o deus desket brezhoneg goude ganedigezh a gomz brezhoneg d'o bugale kalz nebeutoc'h eget ar re o deus desket a-raok pe da vare ganedigezh ar bugel kentañ. 32% eus an tadoù ha 15% eus ar mammoù-se zo deuet a-benn da blantañ brezhoneg etre int hag o bugale avat.

Niverusoc'h eo ar mammoù o deus desket brezhoneg goude ganedigezh o bugel kentañ. Alies e vez ar mammoù e karg eus ar skoliata muioc'h eget an tadoù ha soñjal a ra da lod eo talvoudus deskiñ brezhoneg evit gallet sikour gwelloc'h o bugale skoliataet e brezhoneg. Er c'hontrol eo brasoc'h an niver a dadoù o deus desket brezhoneg a-raok ganedigezh o bugale.

2.2.4. Treut eo an treuzkas er familhoù


◆ Ha komz a rae an tadoù ha ar mammoù brezhoneg d'o bugel pa oa 5 bloaz ?



Diazez : 87 mamm ha 81 tad (168)

Lenn : 20 % eus mammoù brezhonek al liseidi a gomze brezhoneg atav d'o bugel pa oa 5 bloaz.

◆ **Ha komz a ra an tadoù ha ar mammoù brezhoneg d'o bugel hiziv ?**




Diazez : 86 mamm ha 80 tad (166)

Lenn : 14 % eus mammoù brezhonek al liseidi a gomz brezhoneg atav d'o bugel hiziv.

Evezhiadennoù : Ar braz eus ar gerent vrezhonek ne dreuzkasont ket ar yezh d'o bugel (58 % komz brezhoneg a-wechoù pe james). Diskouez a reont d'al liseidi e c'hall bezañ un diforc'h etre anavezout ur yezh hag ober ur implij sokial anezhi. Un diforc'h bras zo etre an tadoù hag ar mammoù : 57% eus an tadoù hag 28% eus ar mammoù a dreuzkas ar brezhoneg d'o bugel. Abegoù an diforc'h-se zo o vezañ studiet : ar fiziañs en e/he barregezh, ar mod hag ar mare deskiñ, ar perc'hennañ yezh don ha war-c'horre, ar pezh er stourm, sell ar pried... Seul goshoc'h ar vugale seul wanoc'h an treuzkas gant ar mammoù ha seul greñvoc'h an treuzkas gant an tadoù (pa geñverier an treuzkas pa oa 5 bloaz al liseidi hag an treuzkas hiziv).

◆ **Niver a dreuzkaserien er familhoù**


Familhoù



Diazez : 292 familh

Lenn : E 12% eus ar familhoù (36 familh) e vez treuzkaset ar brezhoneg gant an tad hepken.

Liseidi



Diazez : 314 lisead


Lenn : 3% eus al liseidi (10 lisead) e vez komzet brezhoneg dezho er gêr gant o zad hag o mamm atav pe kement hag en ur yezh all.

Evezhiadennoù : E 47% eus familhoù al liseidi ez eus un tad pe ur vamm (pe an daou) a oar brezhoneg. Padal n'eus nemet 20% eus ar familhoù ma'z en deus choazet an tad pe ar vamm pe an daou komz brezhoneg d'ar vugale atav pe kement hag en ur yezh all. Hollbouezus eo kompren eus pelec'h e teu an diforc'h etre an daou sifr-se evit skoazellañ gwelloc'h an treuzkas er familhoù en dazont.

◆ **Live an treuzkas er familhoù**


| Mamm / tad | Atav | 50 % | A-wechoù | James |
|------------|----------------|---------------|---------------|-----------|
| Atav | Treuzkas kreñv | | | |
| 50 % | | Treuzkas etre | | |
| A-wechoù | | | Treuzkas gwan | |
| James | | | | N'eus ket |

Familhoù



Diazez : 292 familh
 Lenn : 7 familh (da lâret eo 2% eus ar familhoù) a dreuzkas kreñv ar brezhoneg d'o bugale.


Liseidi



Diazez : 314 lisead
 Lenn : 77 % eus al liseidi ne vez ket treuzkaset dezho ar brezhoneg gant o zud tamm ebet.

Evezhiadennoù : N'eus nemet 7 familh war 292 ma vez ar brezhoneg yezh pennañ pe yezh nemeti komzet gant ar gerent padal ez eus 34 familh ma oar tad ha mamm brezhoneg mat pe mat a-walc'h. Pezh a ziskouez n'eo ket trawalc'h e vefe gouezet brezhoneg gant an daou bried evit ma vefe plantet brezhoneg en ti da vat.

◆ Ha komz a ra al liseidi brezhoneg ouzh o zud ?



Diazez mamm : 92 lisead
 Diazez tad : 85 lisead
 Lenn : 13 % eus al liseidi e oar brezhoneg o mamm a gomz brezhoneg outi atav pe dost.

Evezhiadennoù : Al lodenn vras eus al liseidi o deus ur pleustr yezhel heñvel ouzh hini o zud. Ma vez komzet dezho e brezhoneg atav gant o zud e respontont e brezhoneg atav peurliesañ. Pa n'eo ket ar memes pleustr yezhel e vez atav al liseidi a gomz nebeutoc'h eget o zud. Meur a abeg a c'hell bezañ d'an dra-se : diouer a varregezh yezh evit lâret kement tra a zo da lâret, strategiezh enebiezh a-berzh ar grennarded, strategiezh ar gerent n'o deus ket broudet kement-se implij ar brezhoneg gant o bugale...

Pevar lisead war bemp a vev en ur familh e-lec'h ma vez da nebeutañ un den gour tomm ouzh ar brezhoneg. An deskiñ brezhoneg n'eo ket an abeg nemetañ d'ar skoliata e Diwan avat. Abegoù kognitivel pe pedagogel a vez meneget gant kalzig a liseidi da skouer.

En em gavout a ra el lise Diwan bugale ar gerent mennetañ gant ar brezhoneg : ar re a oar brezhoneg hag ar re o deus desket goude ganedigezh o bugale, broudet gant skoliata brezhonek o bugale alies.

41% eus ar gerent vrezhonek a zeu a-benn da dreuzkas brezhoneg d'o bugale (komz brezhoneg outo atav pe kement hag en ur yezh all). En holl avat n'eus nemet 20 % eus ar familhoù ma vez komzet brezhoneg gant unan eus an daou oadour da nebeutañ (an tad peurliesañ).

Merzet e vez pouez kreñv an treuzkas er familh peogwir e vez asantet choaz an dud gant o bugel alies-tre (85% eus al liseidi o deus un tad pe ur vamm a gomz dezho e brezhoneg atav a respont dezhañ pe dezhi e brezhoneg atav pe dost, da vare al lise d'an nebeutañ).

2.3. Peseurt efed en deus implij ar brezhoneg er familhoù war ar perc'hennañ yezh gant al liseidi ?


2.3.1. Kaout kerent divrezhonek met tomm ouzh ar yezh n'eo ket diefed

Tri rummad zo bet savet :

- 2 TOMM : Tad ha mamm zo tomm ouzh ar brezhoneg (tomm = tomme-tre + tomm a-walc'h)
- 1 TOMM : An tad pe ar vamm zo tomm ouzh ar brezhoneg
- 0 TOMM : Nag an tad nag ar vamm n'int tomm ouzh ar brezhoneg.

Klasket hon eus gouzout hag-eñ en doa santimant ar gerent ouzh ar brezhoneg un efed war perc'hennañ ar brezhoneg gant al liseidi. Tennet eo bet diouzh ar standilhon al liseidi a vez treuzkaset ar brezhoneg dezho gant o zad ha/pe o mamm, evit kaout ur soñj spisoc'h war efed ar santimant-se e-unan (251 lisead).


◆ Santimant barregezh war ar brezhoneg



Diazez : 250 lisead

Len : 72 % eus al liseidi eo tomm o zad hag o mamm ouzh ar brezhoneg a gav dezho o deus ul live mat pe mat a-walc'h e brezhoneg.


◆ Santimant ouzh ar brezhoneg



Diazez : 249 lisead

Len : 7 % eus al liseidi eo diseblant o zud ouzh ar brezhoneg a zo tomm-tre ouzh ar brezhoneg.

◆ Raktres treuzkas brezhoneg d'o bugale



Diazez : 185 lisead (bet graet o soñj gante war an treuzkas)

Len : 13 % eus al liseidi eo diseblant o zud ouzh ar brezhoneg zo en soñj da gomz brezhoneg d'o bugale atav m'o defe bugale un deiz bennak.

Santout e vez tomm an tad hag ar vamm ouzh ar brezhoneg a ro talvoudegezh d'ar yezh, memes pa ne vez ket komzet brezhoneg gant an dud. Santimant ar gerent en deus un efed war santimant al liseidi ouzh ar brezhoneg, war ar fiziañs en o barregezh yezh ha war o raktres treuzkas. Kreñvoc'h eo treuzkas ar santimant pa vez rannet gant an tad hag ar vamm (dre vras e vez kreñvoc'h treuzkas ar mennozhioù eus ar gerent d'ar vugale pa vezont douget gant an tad hag ar vamm). Padal, ar fed a vefe tomm an tad hag ar vamm ouzh ar brezhoneg ne zegas tamm efed ebet war implij ar brezhoneg etre ar breudeur ha/pe ar c'hoarezed.

En tu all eus an ahel e vez merzet ez eus liseidi tomm-tre pe tomm a-walc'h ouzh ar brezhoneg, padal n'eo ket tomm ouzh ar brezhoneg nag o zad nag o mamm. Lod a vefe prest da dreuzkas ar yezh d'o bugale zoken. Diskouezet a ra kement-se efedoù ar skoliata e Diwan evel hon eus gwelet el lodenn gentañ. Dedennus eo gwelet e c'hell Diwan degas lorc'h gant ar brezhoneg memes d'al liseidi a zo bet enskrivet evit abegoù pedagogel pe kognitivel. Tañva ar soubenn a lak lod eus al liseidi da gavout mat ar brezhoneg.

2.3.2. An treuzkas er familh en deus un efed kreñv war ar re yaouank

Adkavomp a reomp an 314 lisead er sifroù dindan.


◆ Santimant barregezh war ar brezhoneg

Divrezhonek : divrezhonek an tad hag ar vamm.

Brezhoneg un tamm : un tad pe ur vamm d'an nebeutañ a oar un tamm brezhoneg.

Brezhoneg hep treuzkas : un tad pe ur vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg + treuzkas ebet pe gwan er gêr.

Brezhoneg ha treuzkas : un tad pe ur vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg + treuzkas er gêr (kreñv pe etre).




Diazez : 313 lisead

Len : 41 % eus al liseidi a vez treuzkaset ar brezhoneg dezho er gêr gant o zad pe o mamm pe an daou a gav dezho e komzont brezhoneg mat.

Evezhiadennoù : Barregezh ar gerent war ar brezhoneg hag an treuzkas er familh a lak santimant barregezh al liseidi da greskiñ a galz. N'eo ket ur souezh pa soñjer e vez implijet ar yezh ganto war ar pemdez hag e degouezhioù liesseurt. Souezhusoc'h eo gwelet e kresk santimant barregezh al liseidi pa oar brezhoneg o zud, memes pa ne vez ket treuzkaset dezho gant o zud. Hep komz brezhoneg d'o bugale ingal pe alies e c'hell an tadoù ha mammoù-se sikour o bugale evit o labour noz e brezhoneg, pourveziñ dezho danvez sevenadurel brezhonek ha degas dezho un tamm aergelc'h brezhonek (mignoned hag a dremen en ti, familh...), kement a zegouezhioù mat da greñvaat barregezh yezh al liseidi.

◆ Santimant ouzh ar brezhoneg




Diazez : 312 lisead

Lenn : 24 % eus al liseidi o deus tud divrezhonek eo tomm-tre o c'halon ouzh ar brezhoneg.

Evezhiadenn : Splann eo efed an treuzkas war santimant al liseidi ouzh ar brezhoneg. Koulskoude, ur c'hard eus al liseidi a zo tomm da vat ouzh ar brezhoneg daoust ma'z eo divrezhonek-krenn o familh.


◆ Perzh er stourm



Diazez : 312 lisead

Lenn : 5 % eus al liseidi a oar brezhoneg o zud met ne dreuzkasont ket ar yezh dezho a gemer un tamm perzh er stourm evit ar brezhoneg.

◆ Komz gant o breudeur ha/pe c'hoarezed




Diazez : 287 lisead o deus breudeur ha/pe c'hoarezed a oar brezhoneg

Lenn : 33 % eus al liseidi a oar brezhoneg o zud met ne dreuzkasont ket ar yezh dezho ne gomzont ket brezhoneg gant o breudeur ha/pe c'hoarezed james.

Evezhiadenn : Splann eo efed an treuzkas er familh war implij ar brezhoneg gant ar breudeur ha/pe c'hoarezed.

◆ Pleustroù sevenadurel brezhonek




Diazez : 312 lisead

Lenn : Hini ebet eus al liseidi o deus tad ha mamm divrezhonek n'o deus pleustroù sevenadurel e brezhoneg.

Evezhiadenn : Adkavout a reomp aze ar soñj e c'hell ar gerent vrezhonek broudañ pleustroù sevenadurel brezhonek o bugale daoust ma ne gomzont ket brezhoneg dezho.

◆ Raktres treuzkas brezhoneg d'o bugale



Diazez : 308 lisead

Lenn : 33 % eus al liseidi eo divrezhonek o zud ne oaront ket hag-eñ e komzint brezhoneg d'o bugale.

Evezhiadennoù : Splann eo efed an treuzkas er familh war ar raktres treuzkas. 82% eus al liseidi a vez treuzkaset ar brezhoneg dezho er gêr zo en soñj da dreuzkas anezhañ d'o bugale.

Pa geñverier al liseidi o tont eus familhoù « brezhoneg hep treuzkas » ha reoù eus familhoù « brezhoneg un tamm » e weler e vez un tamm diaesoc'h d'ar re gentañ soñjal e c'hellfent plantañ brezhoneg en o familh, pe vefe gant o breudeur ha/pe c'hoarezed pe vefe gant o bugale dezho. Gant ar pezh a vevont en o zi e soñj da lod anezho n'eo ket an implij e diabarzh ar familh pal an deskiñ brezhoneg moarvat, peotramant eo ur pal re ziaes da dizhout.

Pa vez studiet levezon neuz yezhel ar familh war liamm al liseidi ouzh ar brezhoneg e teu war-wel un dra splann : an treuzkas er familh, da lâret eo implij pemdeziek ar yezh er familh, en deus un efed bras-tre war perc'hennañ ar brezhoneg gant ar re yaouank.

Er c'hontrol, divarregezh yezh ar gerent, o diseblanted e-keñver ar brezhoneg, a zo skoilhoù evit perc'hennañ ar yezh gant o bugale. Al liseidi-se e vez diaesoc'h dezho priziañ ar brezhoneg, kavout un dalvoudegezh ennañ. Met lod a gav memestra, dre ar pezh a vevont er skol ha dre ar vrezhonegerien a gejjont gante er skol pe e lec'h all.

Pa vez kaoz deus ar gerent barrek war ar brezhoneg met ne dreuzkasont ket d'o bugale e vez merzet daou disoc'h d'an dra-se : d'un tu ur skoazell evit ar perc'hennañ (skoazell evit deskiñ, danvez brezhonek en ti...) met d'un tu all un diaester un tamm brasoc'h evit o bugale soñjal e c'hellfe ar brezhoneg bezañ ur yezh implijet er gêr gant ar breudeur ha c'hoarezed pe gant ar vugale da zont.